

Ar goas

O ! Marivon va dousik coant
Te ne deui ket d'ar regimant
Cals a dourmanchou
Zo er brezel, (bis)
Bars en touez ar souffrancou
E teufes da vovel.

Ar Plac'h

Ma veze red dim brezeli
Me rofe plom d'an ennemi.
Me ziscœfe va c'hanouillou
E creis an tan (bis)
Vin ket plac'h treitour na lach
Da dennar Prussian.

Ar goas

Va mestres ker e kreis an tan
Evid eur plac'h so re a boan
A gant trous ar c'hanouillou
Teufes bouzar
A gant nerz ar mitraillou
E couefes d'an douar.

Ar Plac'h

Ma ne c'han de vrezelli.
Da renta fas d'an ennemi,
Me a ve cantinière.

Er regimant (bis)
Me ranko mont ganez
Evel gwir plac'h vaillant

Ar goas

Neuze ta va douç Marivon
Qui esomp ou daou o c'halon
Ben e nebeudic amzer
Gant gras Doue (bis)
Ni a retourne d'ar gear
D'ar dro a pep contre.

Partiet in d'ar regiment

O daou gant eur c'halon contant
Do servicha an drapo
In partiet, in partiet
A beteg heur ar maro
Velfond fidel bepred.

Cetu aze va mignonet
Daou den en em garie parfet
O ia bars an honestis
A barfedet, a barfedet
Gret evel a yaouankis
Bezit fidel bepred.

EUN DIMEZI GRET GANT AR VAM

VAR TON : ROSET

Ar Vam

Eruo eo ar moment
Va merc'h ret eo dimezi
A da sonjal breman
Petra peus d'a ober
Da dimezi breman
D'an amzer prezant.

Ar Verc'h

Va mam ne gomxit
Din c'hoas deus a zimezi (bis)
Re yaouanek ho c'hoas
Da vont da ren ar ped
Ne meus n'emet c'houzec vloas
Dimezi ne rin ket.

Ar Vam

Va mere'h sent diouzin
 Rag ma quitain ar bed (bis)
 Gant aon em goudet
 E neur gafes tromble
 Ac ar rest ar vue
 Malherus var ar bed.

Ar Verc'h

Chui ne n'och duet prest c'hoas
 Da mam da zont dam c'huitat
 Ben nebeut blavezio (bis)
 Vin muioc'h avance et
 A ben fin ho teio,
 Me amo va c'hoas gret.

Ar Vam

Va merc'h eun den yaouank
 A so demeus da choulen
 A so den a zoare, (bis)
 Hervez ma seblant din,
 A den a qualite,
 Kemer n'hean hardis.

Ar Verc'h

Va mam en ho cosni
 Ne gleam ket ho refus,
 Ma ran eur barti fall (bis)
 Neur glem na rin biken ;
 Mez c'hui deut da zioual,
 Ne be goude anken.

Ar Vam

Va merc'h me en assur
 Deus ar bez a meus laret
 Gant henes vi contant (bis)
 Te ma vi var ar bed ;
 Dimez hep nec'hamant,
 Bara did vanko ket.

An Dimezi

Cetu ta dimezet
 Ar plac'hie gant he mam
 D'an oad a c'huezek vloas (bis)
 Da vont da roul ar bed
 A goud petra re c'hoas
 Allas ! ne ouie ket.

Ar plijadur

Eur pennad e zin bet
 O veva gant plijadur
 Siouas an erusted (bis)
 E peb neo quet padus
 Rag eman e deuz bed
 En ben gwel dangerus.

Ar dizesper

Ouspen meo, hidalve
 Eo sur ive bambocher
 An arc'hant a gonne (b)
 An dro par an zizun
 Var eur en loneet en e

Ar guel Vue

Pa neur gav c'hoas er ge
 E commans d'ober hue
 Tollet a distollet (bis)
 Alies pazardet
 Cetu aze ar vue
 Zo entre daou brie.

Ar Vam dezolet

He mam pe deus gwelet
 Ar vue voa entreze
 A zo pe dezolet
 O velet de gred
 Malheur er merc'h caret
 Tre vije var ar bed.

Avis

Chui tadou a mamou
 Ne re ket evel homan
 Ne deuket da bressi (bis)
 Dimei ho bugale
 Gant aoun evelti
 O pefe keuz goude.

Lesit ho pugale
 Ho eun d'ober ho choas
 Pa eo int rank usa (bis)
 Eo just d'he choas ive
 Ma ne larit netra
 Velfe divlam goude.